

# intanvez.

eun intanvez deus a wenou zo ed d'ober al lez  
Deun den iaouank deus a Plestin coulz e dizi paouez.

An intanvez a lavare na de chervicher  
ma kerit va heureuji m'o kraï dibreder

me a fournisso dec'h eul levren a pevar c'hi red  
ma hallot mond da chasseal e lec'h mar keret

ma hellot mond da chasseal e ker a var ar meas  
a c'hoas konta aour ag archant d'an intanvez keaz

— ag e leal kadet iaouank calet och a ben  
goëloc'h eo eur c'hos korn(1) butun evid unan gwen

bis  
abalamour kadet iaouank na de guloten

— chujet o dam opinion a chujet e vezin  
ken a kavin eur plac'h iaouank ag a plijo d'in.

ken a kavin eur plac'h iaouank ag a vezo koant  
ne de ket en eur goz intanvez e man va santimant

— An intanvez a lavare var pavé guënou  
Ma ne rentet din va arc'hant me a rei doc'h mizou

n'ousoc'h ked a vad kadet iaouank e moa deoc'h roët  
breman zeuz eun neubeut amzer rois deoch kant skoet

— eo da sur kos intanvez roët o poa din kant skoët  
en eun habid en eun inkane e moa hi lakeët.

A setu va habid uzed a va marc'h maro  
Roïd tu dime kement al a me o chemero  
Roït tu dime kement al a roïd a galon vad  
Oblijet hon e gwel doue dou trugarekad  
Na dre kement ker ma zime me ho henoro  
a roi doc'h eun doussen bocou evid o mado.

(1) K (de korn) écrit en surcharge sur un g primitif.